


Kantik ar skol gristen



DISKAN



Kanomp, kanomp da virviken
 Henor ha gloar d'ar skol gristen,
 D'ar skol a ra d'ar vugale } bis
 Anaout ha karet ho Doue. }

1

Pegen eurus ar parrezioù
 O deuz, dre nerz aluzennou,
 Savet, hervez ho liberte,
 Skolioù kristen d'ho bugale !

2

Er skol gristen na vezint ket
 Skoliet evel ar baianed,
 Heb hano morse, hed an deiz,
 Eus a Zoue nag eus ar feiz.

3

Er skol-ze mistri, mestrezed
 Sul ha gouel a za bepred
 Gant kerent ha bugaligoù
 D'an iliz d'an oll ofissoù.

4

Kement skol gristen zo digor
 A lak' kroaz Jézuz en hénor,
 Araok ha goude labourat,
 Eno'vez grêt eur bedén vad.

5

Ar skol gristen d'ar vugale
 A zesk da genta hent an ee
 Rak ar c'haëra deskadurez
 Eo hent an env, ar zantelez.

6

Ha var-bep-tra e ro dezho
 Deskadurez ar guella'zo.
 Aviset mad, tud dizoue
 A gass dezhi ho bugale.

7

O sant Faron, Patron karet
 Skuillit ho pennoz, ni ho ped,
 Var hor skol nevez, ma teuo
 Da harpa mad ar feiz er vro.

8

Grit ma zento, Guerc'hez Vari,
 An dud ouz urz an Eskopti
 A lavar stard d'an oll gerent :
 Ho mab, ho merc'h er skol gristen !